

Danevell Obererezh

2007



War an dachenn a-hed ar bloaz evit dazont hor yezh

Ofis ar Brezhoneg
Office
de la langue
bretonne



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2007

t
o
o
l
e
n
n

pajenn 2

pajenn

3>Ger or Brezidontez

4>Arsellvo or brezhoneg

9>Glod yezhel

14>Treiñ-Alliañ

17>TermBret, kreizenn dermenodurezh

21>Ajoñs diorren

24>Skipailh on implijidi

Ofis
Brezhoneg
Office
de la
Langue
Bretonne

Meurzh 2007 - Meurzh 2008



Evel bep bloaz, pa sellan un tammig war-gil, n'hallan nemet stadañ pegen lies-seurt ha fonnus eo bet hon obererezh e 2007. Kelaouet ingal eo bet an izili hag an dud e-karg eus oberiantiz an Ofis hag eus

araokadennoù ar brezhoneg er vuhez foran.

Kement-se a-drugarez d'hor roll-skignañ dre Internet (keleier bep pemzektez dre vras), ha d'hor binvioù all : *Da Lenn ha Keleier*.

Ober ha lakaat da c'houzout ar pezh a reer evit kas hor yezh war-raok zo e-touez hor preder pemdez. E 2007 ez eus bet savet meur a venveg evit broudañ implij ar yezh. Skignet eo bet *spilhennig* a dalvez d'ar vrezhonegerien d'en em anavezout. Berzh he deus graet ker-kent ha dre ziv wech hon eus ranket adembann anezhi. Goude-se, diwar skouer un teul embannet e Bro-Gembre, hon eus embannet ur blaketenn evit broudañ ar gerent yaouank da zibab an divyezhegezh abred evit o bugale. Strivañ a reomp evit he ingalañ dre hor rouedad tiez-kêr, e-touez ar magourioù hag an ospitalioù.

War dachenn plas ar yezh er-maez eus ar skol, eo bet dalc'het pevare emgavioù Pondi savet evit an dilennidi. Gallet hon eus lakaat war wel labour ar gevredigezh *Divskouarn*. Klevet hon eus testeni priziuz Dominique Ortuno anezhi ur renerez vagouri euskarek e Biarritz. Keuz am eus memes tra ne vije ket bet niverusoc'h an dilennidi o kemer perzh en devezh eskemm-mañ.

Diorren ar brezhoneg a dalvez lakaat ar yezh war wel ha kas an treñ war-raok. Ouzhpenn an holl labourioù sevenet gant ar servijoù e venegin daou levr ledañ deskamant diwar-benn ar gorilhed ha diwar-benn an oabl zo bet troet ganeomp. Menegin a rin ivez disoc'h studiaden ar Glad war lec'h anvioù kumuniezh kumunioù Norzh ar Vro-Vigoudenn (10 kumun studiet). Troet eo bet penn-da-benn lec'hienn Internet kêr Wened ivez, ar wech kentañ e vije kinniget ur stumm klok eus he lec'hienn gant ur gêr vras. Ur skouer evit kêrioù all. Darvoud brasañ 2007 koulskoude zo bet sinadur un emglev ofisiel kentañ etre an Ofis, rannvro Breizh ha Microsoft. A-drugarez d'an emglev-mañ eo anavezet bremañ ar brezhoneg gant Microsoft ha krog eur da genlabourat evit pourchas modulennoù brezhonek war meziantoù Microsoft. N'eus nemet kant yezh ben-nak all er bed zo kemeret e kont evel-se. Tost da 300 000 a droiennoù zo bet troet ganeomp e 2007 evit lagadennoù titouriñ ha spi hon eus da c'hallout kas hor c'henlabour pelloc'h en amzer da zont gras da youl ar rannvro.

Koulzad *Ya d'ar Brezhoneg* a gendalc'h d'en em zispa-kañ ha da wrizienniñ. Niverus ar c'humunioù o deus sinet ar Garta e 2007, en o zouez kumunioù bras evel an Oriant pe Gwened, Pornizh ar gumun gentañ el Liger-Atlantel, hag an holl gumunioù all, bras pe vrasoc'h e pep korn ar vro. Nag a vuhez en-dro d'ar brezhoneg, nag a from, nag a unaniezh! *Ya d'ar Brezhoneg* a zegas lusk ha fizians d'an dud. Hor staj daou zevezh war an divyezhegezh kaset e CNFPT Breizh zo ur skouer er c'henver-se.

Deuet eo er-maez eil danevell an Arsella war stad ar Brezhoneg. Enni e c'haller gwelet an emdroadurioù pennañ abaoe 2002. Startijenn hag intrudu e-leizh gant ar bed krevredigezhel, strollegezhioù a sikour ar yezh met ivez nec'hamant eus tu ar c'helenn divyezhek ne baouez ket e gresk da c'horrekaat a vloaz da vloaz.

Leun-mat eo bet buhez an Ofis e 2007. Kempouez eo ar c'hontoù ha skoazellet omp bremañ gant rannvro Broioù-al-Liger, ar pezh a verk un emdroadur yac'h e-keñver hor yezh. Koulskoude e rankimp derc'hel da glask arc'hant ouzhpenn e 2008 evit kempouezañ koll skoazell ar Stad war hon daou implij yaouank. 2007 zo bet ur bloavezh adframmañ an Ofis : bodet eo bet ar servijoù en-dro da daou bol bras, ur pol Yezh en e benn Olier ar Mogh a zo aet da rener skiantel, hag ur pol Yezh ha Kevredigezh, lusket gant Visant Roue. Fulup Jakez zo aet da rener hollek ha Fulup Travers hag a heuilh labourioù an Ajañs ha Microsoft zo bremañ e penn kreizenn Roazhon. Eus e du, Guillaume Morin en deus lakaet kreizenn Aodoù-an-Arvor, nevez-digoret e 2006, da drein, ha n'eus ket bet da c'hortoz pell a-raok gwelet disoc'hoù kentañ e labour er vro.

Echuet eo bet ar bloavezh gant vot rannvro Breizh war c'henchamant statud an Ofis a zlefe dont da vezañ un DFKS e 2009. Spi am eus e vo krenvaet an Ofis dre ar statud nevez-se evit ma c'hallfemp kenderc'hel war hon hent ha tapout ur vent nevez. Spi am eus ivez e roio ar statud-se an tu deomp da vont er-maez eus enkadenn ar c'hrouiñ skolioù brezhonek ha sevel da vat ur steuñv diorren war meur a vloaz. Erfin em eus spi e c'hallo raktres Kerampuilh mont war-raok evit ma vo e Breizh ul lec'h arouezel gouestlet d'ar brezhoneg hag evit reiñ d'an holl implijidi ul lec'h labour dereat evel ma vez kavet er broioù all.

Lena LOUARN

Prezidantez Ofis ar Brezhoneg



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2007

Arsellva ar brezhoneg

▶ EIL DANEVELL HOLLEK WAR STAD AR BREZHONEG

Abaoe 2005 e oa bet gouestlet un darn vat eus nerzh ar servij d'ar rak-tres-se a oa e bal kinnig stad ar yezh war bep tachenn e Breizh, ha kement-se en div yezh. Kas da benn ha peurlipat skrid an eil danevell hollek war stad ar brezhoneg eo bet labour pennañ servij an Arsellva e deroù 2007. Ur wech echu ganti e chome c'hoazh da frammañ make-tenn al levr ha da heuliañ an embann anezhañ.

D'an 12 a viz Kerzu 2007 hor boa kinniget *Ar brezhoneg e-kreiz ar Roudour* d'ar gazetennerien. Dre-se hor boa gallet sachañ evezh mediaoù pennañ Breizh (France 3 Ouest, Ouest-France, Le Télégramme, h.a.) ha reiñ da c'houzout da Yann Vreton petra eo disoc'hoù pennañ al labour kaset da benn. Evit magañ o freder war ar yezh eo bet kaset an danevell da zilennidi e-leizh, koulz ha da bennadurezhioù liesseurt ha da bennoù bras bed kevredigezhel Breizh. Kendalc'het ez eus bet gant al labour brudañ al levr - e-touez mediaoù ar c'hwech'horn peurgetket - e deroù 2008.



▶ ENKLASKOÙ WAR STAD AR BREZHONEG



Gant ar servij e vez heuliet emdroadur stad ar brezhoneg en holl c'hennadoù eus ar gevredigezh a vloaz da vloaz.

Stad ar c'helell divyezhek e Breizh e 2007

Savet ez eus bet un teul divyezhek klok da ginnig distro-skol 2007 en hentadoù divyezhek, evel bep bloaz. Kinnig a reer ennañ un dielfennadur eus stad an traoù hag an emdroadur dre gumun, dre vro, dre zepartamant, dre live ha dre hentad.

Evit ar wech kentan ez eus bet staget ouzhañ un teuliad-se ur c'hinnig eus stadegoù ar c'helell divyezhek er c'helell dre-vras evit ar bloavezh-skol 2006/2007. Betek-henn, ar stadegoù-se az ae d'ober un teuliad dig distag met kavet hon eus gwelloc'h bodañ an daou evit rein ur sell klok war ar c'helell divyezhek en un teul hepken.

Kaset eo bet an diell-se d'ar pennoù bras dave ha lakaet eo bet enlinenn war hol lec'hienn.




Kartenn a ziskouez ar c'helell divyezhek d'an distro-skol diwezhañ ha grafiek emdroadur an niver a skolidi divyezhek abaoe 1977.

Kelenn d'an oadourien

Kenderc'hel a ra servij an Arsellva da heuliañ emdroadur ar c'hinnig hag ar goullenn evit an deskiñ d'an oadourien. Dre an enklask kaset da benn e-kerzh an hañv en deus gallet lakaet enlinenn roll ar frammoù a ginnig kentelioù brezhoneg d'an oadourien evit ar bloavezh 2007-2008 adalek miz Gwengolo. Un eil enklask a zo bet kaset da benn e miz Here-miz Du evit sevel bilans an distro-skol en ur stadañ an niver a zeskiñ e-kerzh ar bloavezh-skol-mañ. Diwar c'houlenn Deskiñ d'an Oadourien (DAO) e oa bet niveret ar gelennerien a ro kentelioù brezhoneg ivez. Savet ez eus bet un teul a ginnig disoc'hoù pennañ hon enklask. Enlinenn eo bet lakaet an teul-se

e deroù miz Genver 2008 ha kaset eo bet d'ar frammoù dave koulz ha da zilennidi zo.

Kinniget en deus an Arsellva disoc'hoù e enklaskoù en emvod bilans an distro-skol d'ar 17 a viz Du. Dre bourchas roadennoù war an tem-se (emdroadur ar c'hinnig, emdroadur an niver a zeskiñ) e kemer perzh an Arsellva e diorren an hentad deskiñ d'an oadourien hag ar stummadur dibaouez.



Roll ar c'hentelioù d'an oadourien 2006-2007 / Kartenn an niver a zeskiñ er c'hentelioù noz dre live a gaver e teul ar c'helell d'an oadourien.



Ofis ar Brezhoneg

Office de la Langue Bretonne


Danevell obererezh 2007

▶ DIAGNOSTIKOÙ DRE VRO

Boulc'het eo bet ar chanter-se dre sevel kartennoù ha grafikoù dre vro. Un diazezh a bouez evit empenañ an danvez diagnostikoù ez eont

d'ober. Teuliadoù dre vro zo bet savet ivez a vo bodet titouroù a bep seurt enno.

▶ KELEIER OFIS AR BREZHONEG



Un dastumad pennadoù a denn da vuhez ar yezh er gevredigezh eo Keleier Ofis ar Brezhoneg. C'hwech rubrikenn a ya d'ober an dastumad-se :

- > Labourioù Ofis ar Brezhoneg
- > Ar brezhoneg er vuhez foran
- > Ar mediaoù
- > An embann
- > Ar sevenadur
- > An deskadurezh

hag unan ouzhpenn evit ar yezhoù minorelaet all e Frañs, en Europa hag er bed a-bezh zoken.

Pemp gwech eo bet lakaet Keleier Ofis ar Brezhoneg da zont er-maez e 2007. 180 pajennad a bennadoù a vez e pep niverenn. Tro-dro 500 skouerenn a vez moulet bewech. Ouzhpenn ar pennadoù kazetennoù e c'heller kavout enno roll al labourioù kaset da benn gant servijoù Ofis ar Brezhoneg ; meneget e vez neuze ar strollegezhioù, an ensavadurioù, ar c'hevredigezhioù, ar stalioù hag an embregerezhioù hon eus labour et evita.

Kaset e vez Keleier da izili Ofis ar Brezhoneg, da zillenni di zo, d'an tiez-kêr o deus sinet ur gevrat kefridi gant an Ofis ha da frammoù a bouez e bed kevredigezhel Breizh.

▶ KINNIG HA SKIGNAÑ LABOURIOÙ AN ARSELLVA

Bezañ ur c'hendivizer dave

Kreizig-kreiz labour ar servij eo bezañ gouest da respont da gement goulenn a denn da stad ar brezhoneg. Goulennoù zo a vez graet ingal ouzhip. Strivañ a reomp evit kaout peadra da reiñ ur respont dezho buan.


E 2007 en deus graet an Arsellva war-dro ur 130 goulenn bennak, ar pezh zo kement hag e 2006.

Heñvel a-walc'h e chom danvez ar goulennoù e 2007 ouz ar pezh a oa e 2006. Neoazh, hon enklask war ar postoù-labour bet skignet e deroù ar bloaz en deus sachet evezh kalzik a dud war dodenn an armerzh ha merzet hon eus ivez ez eus bet muioc'h a dud oc'h en em soñjal war labour ar servij pe an Ofis dre-vras, alies gant ar c'hoant da lakaat ar mennozhioù-se da dalvezout e lec'h all e Frañs.


Ar bed foran (aozadurioù ofisiel, dilenni) ha bed ar skolioù-meur (studieren, klaskerien) zo aet war greskiñ o lodenn e-touez ar c'houlennerien e 2007, met an darn vrasañ eus ar goulennoù a zeu eus ar bed kevredigezhel bepred.

Ha pa zeufe atav an darn vrasañ eus ar goulennoù eus Breizh, lodenn Bro-C'hall an hini eo zo kresket ar muiañ e 2007.


Danvez ar goulennoù



Ar c'houlennerien



Orin ar c'houlennerien



Lec'hienn Genrouedad Ofis ar Brezhoneg

Tennañ a ra splet ar servij eus lec'hienn an Ofis evit skignañ disoc'h e labourioù war e bajenn dezhañ

<http://ofis-bzh.org/fr/services/observatoire/index.php>

Kement teuliad a sav an Arsellva a gaver bremañ enlinenn kerent hag echu. Studiadennoù dre dachenn (marc'had al labour, kelenn d'an oadourien, kelenn divyezhek, h.a.), dre diariad (departamantoù, broioù, kumunioù) a c'heller pellgargañ, koulz ha studiadennoù hollek war stad ar brezhoneg (an eil danevell hollek, *Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour*, a c'heller pellgargañ digoust abaoe deroù 2008).

Ouzhpenn-se e tegas ingal ar servij roadennoù nevez war pajennoù al lec'hienn da ginnig ar sifroù pennañ diwar-benn ar brezhoneg ha da ginnig respontoù war pajenn foar ar goulennoù.

Prezegenoù ha stummadurioù

CNFPT

Div lodenn a oa e prezegenn an Arsellva da-geñver ar stummadur daou zevezh bet kinniget gant an Ofis e CNFPT Gwened : "An divyezhegezh en Europa" ha "Stad a vremañ ar brezhoneg".

Skol-veur ar yaouankiz e Breizh

Kuzul Sevenadurel Breizh en doa pedet an Arsellva da ginnig ur brezegenn vrezhonek diwar-benn "Ar yezh e bed an armerzh" da-geñver Skol-veur ar yaouankiz 2007 a oa he zem "Skeudennoù Breizh hag ekonomiezh".

► KENLABOUR ETRE SERVIJOÙ

Kenlabour hag eskemmoù stank a zo etre an Arsellva hag an Ajañs diorren. Bodet int bremañ e pol yezh ha kevredigezh an Ofis. Pourchas a ra an Arsellva roadennoù a bep seurt war stad ar yezh ha prientiñ a ra

► KENLABOUR DIAVAEZ

Aliesoc'h-aliesañ e teu frammoù pe tud eus an diavaez, n'eo ket evit goulenn titouroù resis, met evit goulenn ur gwir genlabour gant an Arsellva anavezet evel framm dave evit ar pezh a denn da stad ar brezhoneg.

Div Yezh Breizh

Gant an Ajañs diorren e kemer perzh an Arsellva er c'henlabour gant Div Yezh Breizh evit prederiañ asambles war an doare da ziorren an hentad divyezhek publik.

Raktresoù evit Meurgêr Roazhon

Kenderc'hel a ra Ofis ar Brezhoneg da vezañ engouestlet e buhez Meurgêr Roazhon, kumuniezh tolpad-kêrioù Roazhon. Degaset en deus an Arsellva e skoazell a-benn sevel ur valizennig da gizidikaat dilennidi an tolpad-kêrioù ouzh talvoudegezh ar c'helell divyezhek.

Deskiñ d'an Oadourien

Deskiñ d'an Oadourien en deus pedet adarre an Arsellva da ginnig disoc'hoù e enklask diwar-benn sifroù distro-skol 2007 evit ar c'helell d'an oadourien da-geñver an emvod bilans aozet e miz Du.

Skol an Emsav

Goulnet he deus Skol an Emsav digant an Arsellva dont da brezegenniñ diwar-benn istor ha stad ar brezhoneg e deroù dalc'h kentañ he stummadur c'hwec'h miz.

Ti ar Vro Kemper

Evit an eil gwech en deus Ti ar Vro Kemper pedet an Ofis da zont d'ober ar poent war stad diorren ar c'helell brezhoneg e trowardroioù Kemper da-heul an distro-skol. E kenlabour gant an Ajañs diorren en deus an Arsellva prientet an dra-se.

Parent'aise

War talvoudegezh an divyezhegezh en deus Parent'aise (ur gevredigezh eskemm etre kerent eus Roazhon) aozet ur brezegenn gant an Arsellva hag un diviz digor gant he izili.

Darempredoù gant ar mediaoù

Evit kelaouiñ ar mediaoù (ha, drezo, Yann Vreton) eus disoc'hoù e enklaskoù en deus an Arsellva aozet daou emvod kelaouiñ : an eil evit kinnig teuliad *Ar brezhoneg e marc'had al labour e 2006*, egile evit brudañ an danevell *Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour*. Seizh atersadenn zo bet ouzhpenn, tennañ a raent d'ar memes temoù peurliesañ.

teuliadoù ha kartennoù a vez implijet gant an Ajañs diorren evit kas ar brezhoneg war-raok er vuhez foran peurgetket.

Sevel ur gronikenn evit ar skingomz

Betek an hañv en deus kendalc'het servij an Arsellva da sevel ur gronikenn skingomz 2 pe 3 munutenn bemdeziek anvet "Parlons breton" evit Radio Alpha (skingomz lec'hel eus ar rouedad RCF). Kenlabour a oa etre an Arsellva ha pol brezhoneg Skol an Emsav evit kas an abadenn-se da benn : perzh an Arsellva a oa degas keleier a denn d'ar yezh, ha gant ar pol brezhoneg e veze kinniget un tañva d'ar brezhoneg gant kentelioù berr. Skignet eo bet an abadenn-se a-hed 2007 e tri departamant : Il-ha-Gwilen (bemdez war-dro kreisteiz ha kard), Penn-ar-Bed (bemdez war-dro Be3D diouzh ar mintin) hag Aodoù-an-Arvor (ur wech ar sizhun).

Diazezet e oa bet an abadenn gant an Arsellva en deroù, e 2004. O vezañ ma oa staliet mat an abadenn eo bet fiziet e Skol an Emsav pennañ da-benn adalek an hañv 2007 pa glote gwelloc'h gant he c'hefridiou.



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2007

Arsellva or brezhoneg

pajenn 8

▶ STEUÑV OBEREREZH ARSELLVA AR BREZHONEG E 2008

- > Sevel en-dro diagnostikoù dre vro war stad ar brezhoneg evit Breizh a-bezh a vo labour pennañ an Arsellva e 2008, rankout a raio bezañ kendalc'het e 2009 moarvat. Divyezhek e vint, ur framm nevez a vo ijinet dezho hag a denno splot eus ar skiant bet prenet o sevel an eil danevell war stad ar brezhoneg. Guzhpenn nevesaat ar roadennoù war pep tachenn e vo taolet evezh en dielfennadurioù ouzh an emdroadurioù a c'heller stadañ e-keñver an diagnostikoù kentañ (2004). Ar wech-mañ adarre ez aimp e darempred gant an dud war an dachenn evit kadarnaat ganto danvez pep teul.
- > Diouzh an amzer a c'hellimp gouestlañ d'an dra-se e c'hellfe un teul a-zifor c'h bezañ ijinet evit an departamantoù. Hervez o barregezhioù dezho e vefe frammet.
- > Da-heul embannadur an danevell hollek e vo kinniget d'an emglevioù bro aozañ ganeomp prezegennoù war stad ar brezhoneg.
- > Ur stumm krennet eus an danevell e framm un daolenn a vo savet gant ar youl skignañ ledanoc'h disoc'hoù pennañ al labour-se (d'an dilennidj, d'ar bed kevredigezhel, h.a.).
- > Nevesaat e vo an teuliad war ar c'helenn brezhoneg/e brezhoneg er skolioù-meur.
- > Diazezet e vo ur renabl eus al levrioù brezhonek a-feur ma vezont embannet deomp da heuliañ a vloaz da vloaz pet levr a zeu er-maez e brezhoneg.
- > Goude an dilennadegoù-kêr e vo savet en diskar-amzer un enklask nevez war soñj dilennidi Breizh diwar-benn ar yezh.



Glod yezhel

▶ AR SKIPAILH-PAD E 2007

Marc Cochard hag Herve Gwegen staliet o-daou e Karaez (29) a vez kentoc'h o plediñ gant ar studiañ anvioù-lec'h hag gant an teuliadoù panellerezh-hent,

e-keit ma ra Yannig Madeg e Plañvour war-dro an dastum distagadurioù anvioù-lec'h kumun ha kumun.

▶ DASTUM HA STUDIAÑ AN ANVIOÙ-LEC'H

An dastum, ar studiañ hag ar reizhañ anvioù-lec'h a chom labour pennañ ar Servij Glad Yezhel. Daou sifr a zo heverk evit 2007 :

- 14 kumun a zo bet studiet o holl anvioù-lec'h dezho.
- 65 kumun, eus ar Mor-Bihan dreist-holl, a zo bet graet un enklask dre gomz enno.

An teuliadoù a zo bet labourer ar muiañ warno e 2007 :

> Lec'hanvadurezh an 8 kumun a ya d'ober Brest Meurgêr ar Mor

Goude un toullad mat a emvodoù gant dilennidi ha teknikourien ar Gumuniezh-kêr en deus kinniget ar servij d'an 8 kuzul-kêr a bep eil disoc'h un enklask war anvioù-lec'h ar vro echuet ha rentet e 2006. E fin ar bloaz eo bet staliet ar panneloù kentañ gant ar stummoù reizhet e kumun Boc'harzh.

> Panellerezh nevez Douarnenez

Emañ Ti-kêr Douarnenez o vont da cheñch e holl banelloù-herchañ. Graet en deus ar Servij Glad war-dro an troidigezhioù hag evit pep anv-lec'h eo bet kemeret e kont gant an Ti-kêr ar skritur reizh bet kinniget gant an Ofis da-geñver ul labour war al lec'hanvadurezh graet e 2004. A-benn heuliañ ar raktres-se a dost en deus kemeret ar servij perzh en un dek emvod bennak hag ouzhpenn en deus adlennet ur 400 c'hant bennak a c'hobarioù panelloù.

> Lec'hanvadurezh tachenn an AOC (Association Ouest Cornouaille Promotion)

Hep mar eo an teuliad brasañ a zo bet da blediñ gantañ warlene. Studiañ, reizhañ ha displegañ holl anvioù-lec'h an 10 kumun a ya dober Kumuniezh Kumunioù Norzh ar Vro Vigoudenn. Da lâret eo 2200 anv studiet, ouzhpenn 10000 stumm kozh skrivet pennaouet en dielloù, 64 brezhoneger a-vihanik enrollet evit un 8000 distagadur bennak dastumet.

> Lec'hanvadurezh Pondi

Savet ez eus bet ur studiadenn glok war lec'hanvadurezh ha korrllec'hanvadurezh kumun Pondi. Ouzhpenn 3500 anv studiet.

Keramezeg



Ofis ar Brezhoneg

Office de la Langue Bretonne

Danevell obererezh 2007

Glod yezhel

paenn 10

Enrolladennoù brezhonegerien (65 kumun) :

Penn-ar-Bed :

- > Ar Gelveneg
- > Enez-Tudi
- > Leskonil
- > Pornaleg-Leskonil
- > Tremeog
- > Triagad

Aodoù-an-Arvor :

- > Tredraezh-Lokemo


Mor-Bihan :

- > An Arzh
- > An Arvor
- > An Arvor - Baden
- > An Drinded-Surzhur
- > Aradon
- > Ar Bonoù
- > Ar Chapel-Nevez
- > Arzhon-Rewiz
- > Baden
- > Baod
- > Bartelame

- > Berne
- > Begnen
- > Berrig
- > Bizhui
- > Brandevi
- > Enizenac'h
- > Gregam
- > Hezoù
- > Inizi ar Mor Bihan
- > Kerzhin
- > Kolpoù

- > Langoned
- > Langroez
- > Lanwelan
- > Laozag
- > Logunec'h
- > Lokentaz
- > Lokeltaz
- > Lokfillberzh
- > Lokmaria-Gregam
- > Lokmaria-Kaer
- > Melrant
- > Meukon
- > Gweltaz
- > Gwened

- > Gwennin
- > Mourieg
- > Moustoer-Logunec'h
- > Moustoer-Remengol
- > Noaloù
- > Persken
- > Plaodren
- > Plañvour
- > Pleñver
- > Pleuwigner
- > Plougouvelen
- > Ploveren
- > Pluniav
- > Pluveleg
- > Pluverin
- > Radeneg
- > Regini
- > Remengol
- > S.-Aleustr
- > S.-Armael
- > S.-Goneri
- > S.-Nolf
- > S.-Teve
- > S.-Yann-Brevele
- > Sine
- > Sterwenn
- > Sulnieg
- > Surzhur
- > Teiz
- > Tredion
- > Trevlan



2007

100 eurvezh a enrolladennoù ouzhpenn evit un niver a 98 brezhoneger aterset hag enrollet.

2000-2007

Ar Servij Glad Yezhel a zo gantañ e fin 2007 335 eurvezh a enrolladennoù evit un niver a 437 den enrollet war 146 kumun disheñvel

An dielloù studiet :

Gladroll Napoleon

Da-geñver an enklaskoù war an dachenn ez eus bet studiet en un doare sistematik an diell-mañ eus penn-kentañ an XIX^{vet} kantved, da lâret eo war 65 kumun (sellet ouzh listenn ar c'humunioù a zo bet graet un enklask dre gomz enno e 2007).

Marilh ar boblañs ar Renad Kozh, Adaozadur an Daledoù, an noblañs...

- > Tredraezh-Lokemo (22)
- > Kastell-Paol (29)
- > Pondi (56)
- > Plouvagor (29)

- > Gourlizon (29)
- > Landudeg (29)
- > Plogastell-Sant-Jermen (29)
- > Purid (29)
- > Pouldreuzig (29)
- > Plovan (29)
- > Trégad (29)
- > Ploneour-Lanwern (29)
- > Plozeved (29)
- > Gwiler-Kerne (29)

Lec'hanvioù ar gumun studiet, displeget ha skoueriekaet :

- > Tredraezh-Lokemo (22)
- > Kastell-Paol (29)
- > Plouvagor (22)
- > Pondi (56)
- > Gourlizon (29)
- > Landudeg (29)
- > Plogastell-Sant-Jermen (29)

- > Purid (29)
- > Pouldreuzig (29)
- > Plovan (29)
- > Trégad (29)
- > Ploneour-Lanwern (29)
- > Plozeved (29)
- > Gwiler-Kerne (29)

Tost da 6000 anv-lec'h studiet

▶ SKOUER A ZISKOUEZ AR MOD DA LENN HA DA IMPLIJOUT AN TITOUROÙ A GAVER ER STUDIADENN WAR ANVIOÙ-LEC'H PONDI (56)

Saniel

< Stumm skoueriekaet pe stumm modern reizh

- **Treuzskrivadur fonetek :** < Distagadurioù bet treuzskrivet en API (Lizherenneg Fonetek Etrebroadel)

[sãnije:] [sã'nje] /sã'nje/ [sãne] [sã'nje]

- **Stummoù kozh testeniekaet :**

- > 1406 : Saniel
- > 1416 : Saniel
- > 1416 : Saniel
- > 1697 : Siniel paroisse de Noyal
- > 1804 : Saint Niel
- > 1814 : St-Niel
- > 1815 : Senniel
- > 1830 : St Niel
- > 1844 : St Niel
- > 1846 : St Niel
- > 1870 : Saint-Niel

Stummoù kozh skrivet testeniekaet

- **Reizhskrivadurioù disheñvel en implij hiziv-an-deiz :**

(Saint-Niel)

Reizhskrivadurioù testeniekaet war ar gumun

- **Titouroù all diwar-benn an anv :**

L'orthographe francisée du nom Saint Niel laisse à croire que nous sommes ici en présence d'un énième nom de lieu-dit composé avec un nom de saint. Les prononciations ainsi que les formes anciennes attestées du toponyme tendent à prouver qu'il s'agit d'une traduction totalement erronée par homonymie de *Saniel* (1406) vers *Saint Niel* (2007), avec transformations successives au cours des siècles. D'ailleurs, M. Latimier, dans son rapport sur la toponymie pontivyenne de 1972 note déjà qu'il n'existe pas de saint du nom de *Niel*, que le nom se prononce "seuniel" et qu'on écrivait *Saniel* en 1406. Notons tout de même qu'Albert Deshayes (Dictionnaire des Noms de Lieux Bretons) affirme pourtant que le nom de *Niel* est attesté sous cette graphie en 1060 et que Joseph Loth (Les Noms des Saints Bretons) évoque l'existence vers 1437 d'une famille noble de Lamballe appelé Saint-Niel... Il nous semble que si, effectivement, le terme saint, sant en breton, avait été un élément constituant de ce toponyme il aurait été clairement orthographié saint ou sant dans les formes anciennes et non pas "sa-" ou "si" comme c'est le cas. Nous pencherons plutôt pour une étymologie à partir d'un radical *San*, terme qui désigne le fond humide de la vallée, un canal, un conduit. Ce terme a disparu presque totalement du vocabulaire du breton moderne, sauf peut-être dans le Tregor, ce qui a favorisé sa confusion, en toponymie, avec *sant*. La situation géographique du lieu-dit et la proximité d'un ruisseau portant le même nom conforte cette hypothèse. Le deuxième élément du nom pourrait être le terme *gell*, variante *yell* qui revêt plusieurs sens en breton, dont l'épeautre ou nielle, variété de froment, mais également une couleur : bai, brun d'où par extension noix, noisettes... Cette dernière hypothèse n'a pas notre faveur, ce terme *Gell* ou *Yell* se retrouvant également dans les toponymes de type *Gellen*, *Yellen* souvent situés dans des zones humides, sans assurance quand à son sens exact. Un rapport étroit avec l'eau, les zones humides ne semble pas cependant faire de doute. *Sanell* désigne en breton également une saignée, un chenal... Voir également le nom Signan.

< Titouroù diwar-benn an anv



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2007

▶ PANELLEREZH DIVYEZH EK

Etre 2006 ha 2007 eo chomet stabil ar sammad a c'houlennou treiñ ha studiañ anvioù-lec'h o tont eus ar C'huzulioù-departamant (sellet ouzh ar sifroù en daolenn izeloc'h).

Labourioù bet kaset da benn diwar goulenn aozadurioù a bep seurt (strollegezhioù lec'hel, broioù degemer...):

- Studiañ anvioù-lec'h
- Treiñ plakennoù-straed
- Treiñ menegoù evit panelloù

- > Ti-kêr Pont-Skorf (plakennoù-straed + lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Sant-Teve (lec'hanvadurezh + plakennoù-straed)
- > Ti-kêr Santez-Elen (gerdarzh ha reizhskrivadur anv ar gumun)
- > Ti-kêr Sarzhav (lec'hanvadurezh + plakennoù-straed)
- > Ti-kêr Sulnieg (gerdarzh ha reizhskrivadur anv ar gumun)
- > Ti-kêr Gwened (adlenn gobarioù panelloù + troidigezhioù)

Kumuniezhioù Kumunioù

- > Kab an Oriant, Kumuniezh Kumunioù (panelloù Glad)

Kuzul-departamant

- > Kuzul-departamant, Renerezh an Hentoù-departamant (panelloù henchañ + enklaskoù lec'hanvadurel : e 2007 : **41 goulenn evit 880 meneg studiet**)

Aozadurioù all

- > Sindikad Diazad ar Skorf (panelloù glad + panelloù henchañ)

Il-ha-Gwilen

Tiez-kêr

- > Ti-kêr Redon (panelloù glad)
- > Ti-kêr Baen-Ballon (panelloù glad)

Liger-Atlantel

Tiez-kêr

- > Ti-kêr Pornizh (lec'hanvadurezh)



Aodoù-an-Arvor



Mor-Bihan

Tiez-kêr

- > Ti-kêr Berne (lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Gwidel (lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Lannarstêr (panelloù henchañ)
- > Ti-kêr Langoned (lec'hanvadurezh + troidigezhioù)
- > Ti-kêr an Oriant (plakennoù-straed + panelloù henchañ)
- > Ti-kêr Brelevenez (gerdarzh ha reizhskrivadur anv ar gumun)
- > Ti-kêr Lostenk (lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Pleskob (lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Plañvour (lec'hanvadurezh + troidigezhioù)
- > Ti-kêr Pleuwigner (lec'hanvadurezh)
- > Ti-kêr Pondi (Lec'hanvadurezh + plakennoù-straed)

Tiez-kêr

- > Ti-kêr Perwenan (lec'hanvadurezh + plakennoù-straed)
- > Ti-kêr Rostrenenn (troidigezhioù)
- > Ti-kêr Tredraezh-Lokemo (lec'hanvadurezh + troidigezhioù)
- > Ti-kêr Prad (adlenn gobarioù panelloù hent)
- > Ti-kêr Plounerin (lec'hanvadurezh + troidigezhioù)
- > Ti-kêr Plouilio (lec'hanvadurezh)



> Ti-kêr Leskoed-Gwareg (plakenoù-straed)

> Ti-kêr Tremargad (lec'hanvadurezh)

> Ti-kêr Lannuon (adlenn gobarioù panelloù)

Kumuniezhioù Kumunioù

> Tolpad Keriou Bro Lannuon (troidigezhioù + lec'hanvadurezh)

Kuzul-departamant

> Kuzul-departamant, Renerezh an Hentoù-departamant (panelloù henchañ + enklaskoù lec'hanvadurel)

> Kuzul-departamant, Servij an Endro hag al lec'hiennoù tener (lec'hanvadurezh + troidigezhioù)
e 2007 : **8 goulenn evit 156 meneg studiet**

Penn-ar-Bed

Tiez-kêr

> Ti-kêr Pluguen (plakenoù-straed + adlenn kartenn ar gumun + troidigezhioù)

> Ti-kêr Milizag (lec'hanvadurezh + korrllec'hanvadurezh + plakenoù-straed)

> Ti-kêr Kemper (lec'hanvadurezh + panelloù henchañ)

> Ti-kêr Douarnenez (lec'hanvadurezh + plakenoù-straed + adlenn gobarioù panelloù)

> Ti-kêr ar Merzher-Salaun (gerdarzh ha reizhskrivadur anv ar gumun)

> Ti-kêr Karaez (lec'hanvadurezh + plakenoù-straed + panelloù henchañ)

> Ti-kêr Kloar-Karnoed (lec'hanvadurezh)

> Ti-kêr Kerien (lec'hanvadurezh)

> Ti-kêr Tremeven (lec'hanvadurezh + adlenn gobarioù panelloù)

> Ti-kêr Kastell-Nevez-ar-Faou (plakenoù-straed)

> Ti-kêr Brest (plakenoù-straed)

> Ti-kêr Montroulez (lec'hanvadurezh)

> Ti-kêr Kastell-Paol (lec'hanvadurezh)

Kumuniezh Kumunioù

> Brest Meurgêr ar Mor (lec'hanvadurezh + panelloù henchañ)


> Kumuniezh Kumunioù Norzh ar Vro Vigoudenn (studiadenn war an anvioù-lec'h)

Kuzul-departamant

> Kuzul-departamant, Renerezh an Hentoù-departamant (panelloù henchañ + enklaskoù lec'hanvadurel)
e 2007 : **30 goulenn evit 69 meneg studiet**

Aozadurioù all

> Park Arvorig (lec'hanvadurezh + panelloù henchañ)





Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne


Danevell
obererezh
2007

▶ DIAZ TITOUROÙ LEC'HANVIOÙ

- > Mae 2000 : 6500 fichenn
- > Mae 2001 : 9000 fichenn
- > Mae 2002 : 10000 fichenn
- > Mae 2003 : 11000 fichenn
- > Kerzu 2003 : 15000 fichenn
- > Kerzu 2004 : 25000 fichenn
- > Kerzu 2005 : 30000 fichenn
- > Kerzu 2006 : 32000 fichenn
- > **Kerzu 2007 : 39000 fichenn**

39000 fichenn lec'hanvadurel enno :

- **22700 distagadur** ebarzhed (12200 warlene)
- **47000 stumm kozh** testeniekaet (35000 warlene)
- **3200 stumm testeniekaet** er skridoù brezhonek (3000 warlene)
- **9500 adstumm** o implij testeniekaet (8000 warlene)



Deuet eo an diaz ACCESS a implijemp betek fin ar bloavezh 2007 da vezañ distabil-tre. Emañ ar servij o vont da labourat hiviziken war un diaz lec'hanvioù enlinenn er furmad My SQL. Honnezh a c'hallo bezañ bouetaet adal pep lec'hiad eus an Ofis ha n'eo ket just eus Karaez ma veze kaset di a-raok an holl voued betek dastumet war an dachenn.

▶ INSTITUT GÉOGRAPHIQUE NATIONAL – OFIS AR BREZHONEG

E 2005 e oa bet sinet un emglev kenlabour gant an IGN. Kelaouet eo an IGN eus ar cheñchamantoù graet war an dachenn. Kaset e vez dezho

stummoù reizhet an anvioù evit boueta an RGE (Référentiel à Grande Echelle).

▶ LABOUR TITOURIÑ

Respont da ouzhpenn 120 goulenn dre skrid bras pe vrasoc'h o tont eus hiniennoù diwar-benn gerdarzh ha reizhskrivadur anvioù-lec'h ha tud. Da lâret eo kement ha warlene.

Hep kontañ ar goulennoù dre bellgomz.

▶ A BEP SEURT

Prezegennoù evel stummerien e Kreizenn Vroadel ar Velestradurezh Foran Tiriadel e Gwened. Temoù displeget :

- > Istor Breizh ha Lec'hanvadurezh (Marc Cochard)
- > Panellerezh hent divyezhek e Breizh (Herve Gwegen)

▶ RAKTRESOÙ 2008

E 2008 e lakaio ar servij e nerzh war ar studiañ, ar skoueriekaat hag an displegañ anvioù-lec'h Kumuniezh Kumunioù Su ar Vro Vigoudenn ha re ar C'hab. 24 c'humun en holl, hag ur 5000 anv-lec'h bennak.



Treñ - Aliañ

ar brezhoneg

Office
de la langue
bretonne

Of
ar brezh
Office
de la lan
bretonn

▶ SKIPAILH HA LABOURIOÙ FIZIET ER SERVIJ

Tri implijad-pad (Rozenn Morvan, Gwenn-Ael ar C'helleg ha Thierry Fohanno) a labour e servij Treñ-Aliañ Ofis ar Brezhoneg, e Roazhon hag e Karaez, e kenlabour gant ar servij termenadurezh hag ar **c'huzulier war ar yezh**, Iwan Kadored. Abaoe Gwengolo 2007 e labouront dindan rener ezh ur **rener skiantel**, Olier ar Mogn.

Da c'houlennoù a bep seurt en deus respontet ar servij e-kerzh ar bloavezh 2007. 873 gwech ez eus bet fiziet labour ennañ. Peuzheñvel ez eo chomet an niver a c'houlennoù zo bet degaset ur respont dezho. Heverk eo an dra-se pa ouezer eo bet an tri zroer o plediñ gant **troidigezh kit CLIP Microsoft, 300 000 meneg o vont d'he ober**, adalek miz Ebrel betek miz Du. Kement-se a ziskouez ez eo bet gouest ar servij treñ-aliañ da zispakañ nerzh ouzhpenn evit talañ ouzh al labour hag a laka anat al **live micherel** zo bet tizhet gant ar skipailh. Pa rae diouer an amzer hag an dud er servij hon eus ranket **iskevratiñ** gant troerien dizalc'h evit kas da benn teuliadoù treñ a oa deuet gant un ti-embann. An dud a c'houlenne treñ skridoù lennegel zo bet adkaset davet troerien dizalc'h pe tiez-embann, evel m'eo ar reolenn.

E pevar rumm e c'haller dasparzhañ al labourioù fiziet er servij :



Treñ < 50 : testennoù dindan 50 ger troet e brezhoneg,

Treñ > 50 : testennoù ouzhpenn 50 ger troet e brezhoneg,

Adlenn : testennoù e brezhoneg adwelet diwar c'houlenn an dud, ha reizhet enno ar fazioù reizhskrivañ, yezhadur, ereadur ha tipografiezh, pa vez,

Aliañ : titouroù war hor servij, kelaouiñ war an treñ e brezhoneg, kuzuliañ war ar yezh, talvoudegezh gerioù 'zo, o implij hervez ar gendestenn, treuzskrivadurioù fonetek, enrolladennoù klevet, alioù war ar mod da ginnig an div yezh, pourchas teulioù-skouer...

Dasparzh al labourioù fiziet er servij treñ-Aliañ e 2007





Ofis ar Brezhoneg

Office de la Langue Bretonne

Danevell obererezh 2007


Treiñ-Alliañ

16

▶ DOARE AR C'HOULENNERIEÑ

Ar servijen deus troet testennoù gallek (testennoù saoznek a-wechoù) e brezhoneg hag adlennet testennoù brezhonek diwar c'houlenn hiniennoù, kevredigezhioù, strollegezhioù hag embregerezhioù. Gwelet a reer eo **kresket c'hoazh dregantad al labourioù kaset da benn diwar c'houlenn hiniennoù**. Aesoc'h eo dezho mont e darempred gant ar servij dre an teul goulenn titouroù zo war lec'hienn Genrouedad an Ofis evit gwir. Peuzhenvel eo chomet dasparzh ar goulennoù etre ar rummadoù all a-hend-all. Kement-se a ziskouez e talc'h pep doare goulennerien da zont ingal e darempred gant ar servij.

Doare an dud o deus kaset labourioù d'ar servij treiñ-Alliañ e 2007



● E-touez **an aozadurioù foran** o deus fiziet labourioù er servij e 2007 e kaver :

Frammoù a labour war an dachenn sokial, war dachenn ar velestradurezh, ar bedagogiezh, an touristerezh, an armerzh : CFDT, DIREN Breizh, Kamb Micherioù Penn-ar-Bed, Kef goprou tiegezh Norzh Penn-ar-Bed, Klinikenn Kerfriden, KOSG Karaez, KOSG Plañvour, Kreizenn Verañ Melestradurezh Foran Tiriadel Penn-ar-Bed (CDG 29), Kreizenn Vroadel Melestradurezh Foran Tiriadel Breizh (CNFPT), Servij mezegiezh hollek ar re gozh e Pennospital an Oriant, Bod Ti an Diskuizh e Lanniskad, Ospital Kemper...

Aveadurioù sevenadurel : Les Arcs Kewenn, Levraoueg-departamant Aodoù-an-Arvor (Kawan), Levraoueg Kêr Pondi, Leurenn Glenmor Karaez, Mirdi Breizhek an Departamant (Penn-ar-Bed), TNB (Roazhon).

● Bez'emañ ivez :

Kuzul-rannvro Breizh,

Departamantoù Aodoù-an-Arvor, Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan,

Kumuniezhioù kumunioù ar Poc'hêr ha Kreiz Breizh, Bro Kornôg Kreiz Breizh, Bro Douarnenez


Kumuniezhioù tolpad-kêrioù Brest Meurgêr ar Mor, Kab an Oriant, Tolpad-kêrioù Lannuon-Treger ha Meurgêr Roazhon,

Tiez-kêr an Oriant, ar Vouster, Brest, Douarnenez, Gwened, Gwengamp, Karaez, Karnag, Kemper, Kerien, Kewenn, Landerne, Langoned, Lannarstêr, Lannuon, Lesneven, Mellag, Milizag, Naoned, Noal-Pondi, Perwenan, Pierlaye, Plañvour, Pleskob, Plistin, Plouared, Plougastell-Daoulaz, Plougonvelen, Plougraz, Plouilio, Plouizi, Plouvien, Plozeved, Pluguen, Pondi, Pont-'n-Abad, Pornizh, Purid, Redon, Roazhon, Rostrenenn, Sant-Teve, Sarzhav, Sine, Tregastell.

● E-touez **ar c'hevredigezhioù** o deus fiziet labourioù er servij e 2007 emañ : ADUM Project Research Coordination, Ajañs Sevenadurel Breizh, Ajañs Sevenadurel Morvan Lebesque Naoned, Al Levrig, Amzer Nevez, An Erer Kozh, Ar Rouedoù Glas, Atelier d'art Douarnenez, Bremaik, Brest 2008, Bretoned New-York, CAP (Centre Activités Plongée) Trebeurden, Celtic Media Festival, Chasseourien Penn-ar-Bed, CRIJ Breizh, Dastum Breizh, Dazont ar Yezh, Dihun Sant-Teve, Div Yezh Roazhon, Div Yezh Glazig, Diwan Breizh, Diwan Roazhon, Embannadurioù an Amzer ha Breizh, Ervod ar Gelled/Festival Interceltique de Lorient, Euro Rink Hockey 2007, FCPE, Genethon, Gouel Erwan/Fest'Yves, Gouelioù Breizh, Gourenez, IEO-Aude, Institut Héraldique de Bretagne, Kanomp Breizh, Kelc'h Keltiek Athis-Mon/Cercle Celtique Athis-Mon, Kuzul Sevenadurel Breizh / Conseil Culturel de Bretagne, Memoires Vives, Opéra, Paris Breton, Pawel Sader, Poellgor an Tarv, Poellgor kanolioù Breizh hag hentoù bageal ar C'hornôg, Produet e Breizh/Produit en Bretagne, Skeudenn Bro Roazhon, Skol-Uhel ar Vro/Institut Culturel de Bretagne, SNRL (Sindikad broadel ar skingomzioù dieub), Startijenn ar Vro Vigoudenn, Ti ar Vro Bro Leon, War 'l leur.

● E-touez **an embregerezhioù** o deus fiziet labourioù er servij e 2007 e kaver :

3bconseils, Agrimages, AKER YARDS France, AMA, AMO Moulin de la Gare, Archeriezh Ossun, ASHDOCA, Atlantique Traduction, Attitude Graphique, Bara Bio, BIOCOOP an Oriant ha Lannarstêr, Biscuiterie des Iles, Breizh Mag, Breserezh Coreff, Business Language Service, CC-and-Co, CELTIA, CEM (Centre d'Education Motrice), Comes' Design, Coop Breizh, David Rajjou (breutaer), Dexia Sofaxis, Domani gwinierezh La Paonnerie, Editions APOGEE, ENST Breizh, ETG Publicité, Europagi, FRANCE LOIRE SA, GAEC du Haut Planty, Gaëlle Le Guyader (breutaerez), Geval Onyx, GTI Sodifac Customagic, H. Le Bars, HLC, IFIGRAPHIE, IMAGIC, Joel Putaut (lec'hienn GPS), Kabined Kerjean, Kabined Martinez Naoned, Kelenn, Kellidenn, Kemenn, Kerpont Industrie, KMA 29, KORO MARKETING, Laezherezh LORCO, LCI BRETAGNE (ajañs treiñ), Les Douceurs de Bretagne, Limagine, MADILAR FRAN, MARIOTI, Nouvelle Vague, Oscipido, Ouestélio, Ouest-France, Park ijinnañ Meskoad, Phisale Graphic, PlastoBreizh, Preti "ar Peñsead"/ Restaurant "Le Naufragé", Scheller-Invest, Sport Breizh, strilherezh WARENGHEM (Lannuon), Téléstar, TEXTO (ajañs kehentiñ), Ti an Diskuizh, Ti-krampouezh Jarnoux , Ti-moullan Tanguy, TV Roazhon, Veolia Eau, Veolia Propreté, Yprema.



Un titl nevez e rummad Egorenn ar skiantoù



▶ DOARE AL LABOURIOÙ FIZIET ER SERVIJ

Hervez an titouroù zo bet roet dimp, setu amañ an implijoù pen-
nañ zo bet graet eus labourioù 2007 :

- **Pedadennoù, hetoù, kemennoù** - ouzhpenn 20 % eus al labourioù,
- **Panellerezh** : panelloù a denn d'ar glad, totemoù, panelloù titourañ, dis-
kouezadegoù - war-dro 16%,
- **Geriaoueg, menegoù a bep seurt, anvadurioù, titloù** - 15%,
- **Kazetennoù, kannadigoù** : pennadoù-stur, pennadoù-kaoz, skridoù a
bep seurt - 11%,
- **Teulioù war ar Genrouedad, lec'hiennoù Kenrouedad, teulioù
elektronek** - 6%,
- **Testennoù ofisiel, melestradurel pe kenwerzhel** - 6%,
- **Bruderezh, follennoù-pleg, fichennoù, programmoù** - 4,5%
- **Plaketennoù, levrigoù, albomoù** - 3,5%...



Plaketenn bet troet evit
ar C'huzul-rannvro



Panell e CeltiVannes

▶ TROIDIGEZHIOÙ GRAET DIWAR ZIVIZ AN OFIS

Abae 2005 e vez kinniget gant ar servij **troidigezhioù testennoù skouer pe patromoù teulioù divyezhek war lec'hien Genrouedad an Ofis**, er rann Treiñ-Alliañ

(<http://www.ofis-bzh.org/fr/services/traduction/index.php>).

Setu amañ teulioù zo bet ouzhpennet pe nevesaet e 2007 :

- Menegoù evit ar fichennoù-gopr ha fichenn-c'hopr skouer
- Levrig familh
- Gwareziñ ar vinored ha kastizañ ar vezvidigezh dirak an holl

Kendalc'het en deus ar servij da vogañ **Wikipedia**

(<http://br.wikipedia.org/wiki/Degemer>), an holloueziadur frank ha liesyezhek war ar Genrouedad. Derc'hel a ra ar brezhoneg d'e renk hag e chom e-tro 50^{ed} yezh ar raktres gant tost da 19000 pennad-skrid echu pe war ar stern.

E 2007 eo bet kaset da benn vat ivez troidigezh vrezhonek ar meزيant Nireblog a ro an tu da sevel blogoù en un endro hollvrezhonek.

▶ TREIÑ WAR AR PRIM

Dafar jubenniñ, aes da implijout, a vez prestet evit netra gant Ofis ar Brezhoneg d'an aozadurioù a fell dezho. 16 gwech eo bet amprestet ar valizenn zo enni an dafar teknikel ret, tra ma oa bet goulennet 13 gwech e 2006 ha 23 gwech er bloavezh kentañ. Daoust m'eo gwelloc'h ar sifr eget e 2006 e chom da vrudañ muioc'h ar servij digoust-se. Alies

a-walc'h ne gred ket ar frammoù brezhonegerien goulenñ servijoù tud a vicher ha bec'h o devez o klask tud varrek prest da jubenniñ a-youl vat. Se a vir outo d'ober gant an dafar a-dra-sur. Hollbouezus ez eo avat evit statud foran ar brezhoneg.

▶ TRADOS

Prenet eo bet ar meزيant Trados gant Ofis ar Brezhoneg ha lakaet eo bet war ur post. Ur meزيant evit an droerien a vicher ez eo Trados. Reiñ a ra an tu da grouiñ memorioù dre zanvez, dre zoare testennoù ha da adkavout peseurt implij zo bet graet eus termen-mañ-termen. A-bouez bras eo ar meزيant-se

evit gounit amzer ha bezañ barrekoc'h c'hoazh da respont en un doare prim d'ar goulennoù en em gav ingal-ingal er servij. Ur c'hammed ouzhpenn war hent ar micherelaat ez eo ivez ha mat e vo mont pelloc'h gant an hent-se.



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2007

TermBret, kreizenn dermenadurezh

Dibar eo bet ar bloaz-mañ evit TermBret evit daou abeg pennañ : adframmadur DAB ha goulenn Microsoft a oa bet graet anv anezhañ e danevell 2006 hag a zo deuet da vat e 2007.

► TERMENADUREZH WAR VERR DERMEN

Un dermenadurezh prim eo, da lavaret eo ul labour da vezañ kaset da benn diouzhtu ha resis-tre e bal, evit un implijer hepken peurliesañ. Savet e vez un teuliad skoueriekaat e bank termenadurezh TermBret ennañ an holl ditouroù ret evit gallout kinnig un termen e brezhoneg (termenadur, termenoù brezhonek testeniekaet, termenoù en un nebeud yezhoù estren, arguzennoù an dibab...).

Daou zoare goulennerien zo :

Ar c'houlennerien diavaez

146 goulenner a zo deuet war-eeun e darempred gant TermBret e 2007. Liesseurt eo ar c'houlennerien-se evel ar bloavezhioù tremenet : strollegezhioù, embregerezhioù, kevredigezhioù, hiniennoù... Peurvuiñ e kasont rolloù termenoù e galleg pe e brezhoneg da vezañ troet pe gwiriekaet. Gwezhioù all e pellgomzont evit gouzout petra eo an droidigezh vrezhonek evit ur meneg pe perak e kinnigomp ober gant an termen-mañ-termen pe penaos ez a ar greizenn en-dro...

Adkavout a reoc'h an tachennoù termenadurezh pennañ studiet e-kerzh ar bloavezh 2007 er rannbennad gouestlet da dTermOfis. Setu avat skouerioù eus un nebeud termenoù a zo bet studiet ha pouchaset da c'houlennerien zo :

> 28/02/07, evit div liseadez

insecticide/diamprevaner, biodiversité/bevlesseurtered, bambouse-raie/bambouzeg, cirrhose/kiroz...

> 11/05/07, evit un ti-kêr

arbuste/brousgwez, sépulture à inhumation/bez douarañ...

> 22/05/07, evit un troer a-vicher

réceptif/degemerus, cypéracées/kiperakeged, marantacées/marantakeged, dimorphisme sexuel/dimorfegezh revel...

> 04/06/07, evit ul levraoueg-departamant

dépositaire/fiziadour, déposant/fizier, contrat de dépôt/kevrat fiziañ...

> 14/06/07, evit ur farder koñfitur

céléri/ach, pissenlit/c'hwervizon, pastèque/pastekez, saccharose/sakaroz, fructose/fruktoz...

> 19/07/07, evit un embanner

brasseur/breser, fût/fust, cuve matière/beol veskañ, brassin/bresad...

> 31/07/07, evit un ti-diskuizh

infirmerie/klañvdi, jeu de société/c'hoari a-stroll, salle de soins/sal ar prederioù...

Adkavout a reoc'h ar goulennnoù a denn da dachenn an teknologiezhioù nevez er rann TEKNOLOGIEZHIOÙ NEVEZ.

Ar c'houlennerien diabarzh

Darempredoù stank o devez ar servijoù Treiñ-Alliañ, ar c'huzulier war ar yezh ha TermBret. Liammet eo o labour. Respont a ra TermBret da c'houlennnoù ar servij Treiñ-Alliañ dreist-holl hag a-wezhioù d'ar c'huzulier war ar yezh pe da servijoù all DAB, Arsellva ar brezhoneg hag ar Glad yezhel peurgetket.

Hep kontañ ar goulennnoù o tont eus bed an teknologiezhioù nevez ez eus bet degemeret 97 goulenn, bras pe vrasoc'h, a-berzh ar servij Treiñ-Alliañ e 2007. Setu amañ an tachennoù termenadurezh pennañ studiet evit an droerien :

> Stlenneg

> Jedoniezh

> Armerzh politikel ha sokial

> Melestradurezh foran

> Mezegiezh

> Louzawouriezh

s.o. grafikoù ar servij Treiñ ivez.



► TERMENADUREZH PINVIDIKAAT

Anv zo amañ da studiañ korpus ar yezh dre dachenn, da skoueriekaat ha da embann disoc'h al labour-se.

Evit respont da ezhommoù brezhonegerien hiziv a fell dezho ober gant o yezh en un doare naturel e n'eus forzh peseurt degouezh eo eur kaset da labourat. Bep tro ma vez studiet un dachenn ez eo evit bastan d'un ezhomm resis. Klask a ra ar greizenn dermenadurezh studiañ da gentañ an tachennoù mallusañ a zo e-keñver ezhommoù ar gevredigezh.

Talvezout a ra ar gefridi-mañ e ranker kas ul labour don da benn, hervez un nebeud reolennoù ret. Adal ar penn kentañ ez eus bet klasket diazezañ un hentenn labour sirius harpet war skouerioù an estrenvro evel Katalonia, Euskadi, Kembre ha Kebek. Evelto hon eus lakaet reoladoù etrebroadel ISO an dermenadurezh da dalvezout. s.o.

cf. http://www.ofis-bzh.org/upload/travail_paragraphe/fichier/131fichier.pdf

E 2007 ez eus bet gouestlet nebeutoc'h a amzer d'an dermenadurezh pinvidikaat dre m'hon eus labourer kalz evit an teknologiezhioù nevez. Adkregin ganti a vo klasket ober e 2008.

Bodadoù dermenadurezh

Kleweled

Peurechu eo ar studiaden gant ar bodad-labour abaoe ur pennadig amzer. Ouzhpenn 450 termen zo bet studiet en holl. Kaset e vo an disoc'h-se d'ar C'huzul skiantel ha d'un nebeud tud all a labour e bed ar c'hleweled evit kaout o ali. 12 den o doa kemeret perzh er studiaden-se e mod pe vod.

Anvioù gwez Europa

Labourer ez eus bet evit sevel roll an anvioù skiantel ha hini ar penngerioù gallek. Prest eo ar roll-se bremañ. Pennaoùin a reer c'hoazh an termenou brezhonek testeniekaet ha kinnigoù a vo graet a-raok kas an teuliad a-bezh da izili TermBret. Tud a-vicher a gemero perzh er bodad-se ivez. Lañsañ ar bodad-labour e 2008 eo hor pal.



Skignañ geriaouegi bihan

Diseñvel eo an termenou a gaver enno, dre o statud. Termenoù da c'hortoz int. N'int ket skoueriekaet c'hoazh evel m'eo ar re a vez studiet e-pad bodadoù TermBret. Divizet hor boa skignañ an termenou-se memes tra kuit da virout anezho en diabarzh. Fellout a ra da dTermBret kendalc'her da embann geriaouegi diwar-benn ar vuhez pemdez. Ur skoazell int evit ar vrezhonegerien.

Beweze e vez kaset ar geriaouegi-se da izili TermBret, da Guzul skiantel an Ofis ha da hinienoù pe aozadurioù anavezet evit o barrezgioù e brezhoneg pe/ha war an dachenn-mañ-tachenn pe dre ma reont un implij pemdez eus an termenou-se.

E 2007 en doa kendalc'het TermBret da brientin geriaouegi a yad da vrasaat un dastumad kroget e 2002 ha kresket e 2003. Setu ar geriaouegi a zo war ar stern :

- > Keginañ
- > C'hoarioù a-stroll
- > Ober war-dro bugale
- > Urzhiataerezh
- > Chasaal ha pesketa
- > Bageal
- > Endro
- > Buhez an ti-ker

Geriaoueg ar c'heginañ a c'hall bezañ pellgarget war hol lec'hienn (http://www.ofis-bzh.org/upload/travail_paragraphe/fichier/207fichier.pdf).

Ouzhpenn 600 termen a ya d'ober anezhi. Geriaoueg ar c'hoarioù a-stroll zo aet war-raok ivez. War TermOfis e c'hall bezañ kavet holl dermenou an danvez geriaouegi-se zo bet studiet dija. Ur stumm kentañ eus geriaoueg an urzhiataerezh a gaver war holl lec'hienn abaoe 2006. Adsonjet e vo bremañ m'hon eus labourer evit Microsoft evit he brasaat ha kadarnaat dibaboù zo.

► TEKNOLOGIEZHIOÙ NEVEZ

Microsoft

D'an 28 a viz Meurzh 2007 e oa bet sinet un emglev ofisiel etre Microsoft, Kuzul-rannvro Breizh hag Ofis ar Brezhoneg evit ma vo kemeret ar brezhoneg e kont tamm-ha-tamm e-barzh produioù Microsoft. Sellet a ra an emglev sinet ouzh Vista, stumm nevez ar reizhiad korvoñ Windows hag ouzh Microsoft Office 2007, ar pack Office a ginnig ar meziantoù bureveg diazez (Word, Excel, Powerpoint, Outlook).




Sinadur an emglev gant Microsoft

Kroget e oa bet ar c'henlabour etre Microsoft hag an Ofis kerkent ha 2005 pa oa bet troet modulenn an arventennoù lec'hel a dalvez d'an implijerien da resisaat e peseurt

yezhezh e fell dezho lenn an eur hag an deiziad war o urzhiataer. Gras d'al labour kentañ-mañ emañ bremañ degemeret ar brezhoneg e-touez ur c'hant yezh bennak all war Vista (s.o. an arventennoù yezh war o urzhiataer) hag e c'haller lakaat an eur hag ar mizioù e brezhoneg war Windows hag e deiziataer Outlook.

Goude al labour kentañ-mañ e oa bet savet binvioù all a-raok ma c'hallfe ar servij Trein-Alliañ kregin da labourat. Setu an teulioù zo bet savet :

- > un teul anvet *policheck* ennañ 767 erbedadenn e-keñver an dereadegezh politikel (*political correctness*) evit chom hep implijout gerioù zo e produioù Microsoft.
- > ur c'heriaoueg diazez enni 2052 dermen evit ober dibaboù kadarn. Termenoù evel *service provider / pourvezer servijou / fournisseur de*



Munud an etrefas brezhoneg/galleg

services, worm/prenv/ver informatique, bullet/padellig/puce... zo bet studiet evit kaout ur yezh eeun ha resis war un dro.

- > ur sturiver 45 pajenn ennañ erbedadennoù diwar-benn an eradurezh, implij ar pennlizherennoù, ar poentaouin, ar berradurioù hag an teskanvioù, an doare da ginnig ur chomlec'h hag un deiziad, ar geradurioù hag ar yezhadurioù diazez... evit skoazellañ an trein.

Kroget eo ar servij Trein-Alliañ da labourat evit Microsoft ur wezh savet ar binvioù-se. M'eo bet meret an teuliad gant TermBret ez eo ar servij Trein en deus kaset an droidigezh da benn. s.o. rann ar servij Trein ivez. TermBret eus e du en deus studiet an termenou ret evit pourchas respontoù d'an droerien, adlennet, reizhet hag unvanet an troidigezhioù. s.o. ar rann BANK TERMENADUREZH TERMBRET.

269 369 zermen a ya d'ober an droidigezh zo bet goulennet diganimp evit Microsoft Office 2007. Gwiriekaet ez eus bet 56 602 dermen ha kaset int bet da Vicrosoft. Chom a ra da adlenn 212 767 termen c'hoazh.



Ofis ar Brezhoneg

Office de la Langue Bretonne


Danevell obererezh 2007

▶ BITDEFENDER

Ur raktres nevez zo deuet e 2007 ivez : BitDefender. Gant ar servij Trein-Allian eo bet meret. Studiadennoù termenadurezh zo bet kaset da benn evit an teuliad-se ivez. Dibaboù zo bet graet evit termenoù evel *wireless network/rouedad diorjal/réseau sans fil, configuration*

file/fichier de configuration/restr gefluniañ, malware/drougiant/maliciel... Gallet o deus an droerien diazezañ o zroidigezh war al labour graet evit Microsoft ivez. s.o. ar rann Trein-Allian evit gouzout hiroc'h.

▶ BANK TERMENADUREZH TERMBRET : TERMOFIS



5 171 termen a zo bet studiet gant TermBret e 2007 da lavaret eo an eil sifr brasañ goude hini warlene ha kement-se daoust d'al labour bras sevenet evit Microsoft (ar bloaz 2004 zo ispisial dre ma oa bet kendeuzet 2 ziaz). Mont a ra 146 tachenn dermenadurezh disheñvel d'ober ar bank-se ha d'ar 31.12.07 e veze kinniget 29 554 zermen war TermOfis. Ar stlenneg eo an dachenn zo bet studiet ar muiañ e 2007. Tachennoù all evel ar Jedoniezh hag ar Stadegoù zo liammet ouzh teuliad Microsoft. Brasoc'h eo c'hoazh levezon ar goulenner-se war ar studiadennoù bet kaset da benn e 2007 eta : en tu all da 40 %.


s.o. ar grafikoù hag ouzh http://ofis-bzh.org/bzh/ressources_linguistiques/index.php

E deroù 1993 e voe krouet an diaz roadennoù kentañ gant TermBret. Memor al labourioù sevenet gant ar greizenn abaoe e groudigezh eo. Emañ e-kerz an holl abaoe miz Meurzh 2006 : enlinenn emañ war lec'hienn OAB. Anavezetoc'h-anavezetañ eo TermOfis. Da skouer e miz Du 2007 e oa bet graet 20 000 enklask ennañ, 14 000 enklask eus tu ar galleg ha 6 000 eus tu ar brezhoneg. Al lodenn eus lec'hienn an Ofis a vez darempredet ar muiañ eo TermOfis.

Setu ar roadennoù a gaver evit pep termen :

- > pennger brezhonek
- > pennger galleg
- > rummenn-ger ar pennger brezhonek
- > anv an dachenn dermenadurezh
- > liester pe unanderenn ar pennger brezhonek
- > anv skiantel (diouzh ret)

Niver a dermenoù dre dachenn studiet e 2007



▶ RAKTRES OBEREREZH TERMBRET 2008

> Teknologiezhioù nevez

Adlenn ha kas studiadennoù termenadurezh da benn evit ar c'hCaption for Language Interface Pack evit Microsoft. Kendelc'her da ziorren lec'h ar brezhoneg en T.N.

> Embann

Geriaoueg ar c'hleweled
Aktaoù ar c'hendiviz *Teknologiezhioù nevez ha brezhoneg Bemdez, ur frazenn ouzhpenn saozneg-brezhoneg*
Geriadurig brezhoneg-katalaneg

> Bodañ izili TermBret evit lakaat ar gaoz war raktresoù ha mont en-dro ar servij

> Bodadoù termenadurezh

Anvioù gwez Europa
Kod an hent (reolennoù bleinañ)

> TermOfis

Kendelc'her da vagañ ha da wellaat ar bank termenadurezh ha tizhout 40 000 termen enlinenn

> Geriaouegi bihan a vo kaset da benn

Keginañ
Urzhiaataerezh
Endro
C'hoarioù a-stroll
Chaseal ha pesketa
Buhez an ti-kêr

> Rubrikenn enlinenn war an dermenadurezh

A jañs diorren

▶ YA D'AR BREZHONEG : UN DIFRAE KALITE

War hent donaat ha testeniekaat kalite an oberoù kaset da benn eo aet ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg* koulz eus tu ar bed prevez (YAB 1) hag eus tu ar strollegezhioù lec'hel (YAB 2).

D'ar 5 a viz Here 2007, da-geñver 6^{vet} deiz-ha-bloaz ar c'houlzad ha goude bezañ bet tizhet ar 600^{vet} siner (ur c'habined asurañs) e oa bet roet lans da labelioù ar gennad prevez. Tri anezho a zo : "Framm skoazell d'ar brezhoneg", "E brezhoneg pa garoch" ha "Labourat e brezhoneg" diouzh pegen pell ez a implij ar yezher frammoù. Goude un emvod stadañ e pep hini anezho eo bet roet o label d'ar 5 framm kentañ e fin ar bloaz. Ul labour hir e vo evit labelaat ar frammoù. Betek-henn ez eus bet kaset da benn en-tu all da 100 ober dija gant ar 600 siner hag hon eus bet tost 400 emgav ganto. Talvoudegezh d'an holl a zegas al labelioù.



Gant ar bed ekonomikel e vez stankoc'h-stankañ an darempredoù

Labelioù Ya d'ar brezhoneg : an 3 live	
1	Label bestel : «Emao «Brezhoneg» d'ar brezhoneg»
2	Ed label : «E brezhoneg pa garoch»
3	Triob label : «Labourat e brezhoneg»



Al levrig familh divyezhek kentañ

Gant *Ya d'ar brezhoneg* er c'humunioù omp tremenet eus 50 ti-kêr bet votet ar garta ganto e penn-kentañ ar bloaz da 68 e dibenn 2007, pe lavaret en ur mod all eus 400 000 annezad da 560 000. An tiez-kêr-se hon eus bet 214 emvod ganto. En-tu all d'ar sifroù e c'haller stadañ eo bet ar bloavezh 2007 hini ar c'hêrioù bras. Sinet eo bet gant kêrioù Gwened hag an Oriant da skouer ; re Roazhon, Kemper pe Montroulez a sino e deroù 2008 zo bet prientet an traoù evito e 2007. Ar sinadur kentañ el Liger-Altantel, an hini kentañ e Breizh-Uhel zoken, zo deuet ivez (Pornizh d'ar 7 a viz Kerzu). Aet eo al labelaat war-raok rak tremenet omp e 6 miz diwezhañ 2007 eus 1 gumun diwar 5 labelaat da tost 1 diwar 3. Se en deus roet an tu d'an Ofis

da vont pelloc'h e divyezhekaat mont en-dro an tiez-kêr ha kregiñ da welet ha da labelaat an embregerezhioù-servij a labour evit ar strollegezhioù lec'hel (meziantoù, kehentiñ, panellerezh...). Dre se eo deuet er-maez al levrig-familh divyezhek kentañ a zo kinniget bremañ gant ur stal d'an holl diez-kêr a zarempredont. Donaat koulzad *Ya d'ar brezhoneg* zo kaoz evit un tamm mat ivez eus kresk an niver a gevratou-kefridi a zo etre an tiez-kêr hag an Ofis pa'z eus bremañ 15 anezho (e-touez ar re nevez : Brest, Gwened ha Sant-Brieg).






Ofis ar Brezhoneg

Office de la Langue Bretonne

Danevell obererezh 2007

Ajoñs diorren

pajenn 22



Ur gwir dalvoudegezh a siriusted eo deuet da vezañ an argerzh labelaat "Ya d'ar brezhoneg". Roet en deus an tu d'an Ofis da vont pelloc'h en e genlabour gant CNFPT Breizh. Leun e oa ar staj "Merañ an divyezhegezh war un tiriad" a zo kinniget ganto e kenlabour gant an Ofis hag an div drederenn eus ar gargidi a oa aze a labour e kumunioù bet sinet *Ya d'ar brezhoneg* ganto. N'en deus ket ar staj-se e bar e neblec'h all e Frañs.




Staj an Ofis e CNFPT Gwened d'ar 25 ha 26 a viz Here

► AR POUEZ LAKAET WAR AR RUMMADOÙ YAOUANK

En tu all d'al labour a ra an Ofis evit skoazellañ da frammañ ar c'heleñn d'an dud deuet (koulzad brudañ bloaziek tremenet eus 70 ti-kêr da 150 anezho o kemer perzh, labour e burev ar gengevredigezh Deskiñ d'An Dadourien) ez eus bet divizet labourat muioc'h eus tu ar rummadoù yaouank e 2007.

Ur blaketenn zo bet embannet en nevez-amzer, hec'h anv "Ar c'heleñn divyezhek evit ho pugel : kregiñ gant ar vuhez diouzh ar gwellañ". Ar 5000 skouerenn gentañ zo bet skignet en tiez-kêr o deus sinet "Ya d'ar brezhoneg", er magourioù, e-touez an dud o deus ur raktres digeriñ ur skol pe klasoù divyezhek.

En-tu all d'al labour brudañ dre vras ez eus bet labourer war div dachenn bennañ. War hini ar vugale a-raok ar skol eo bet tem 4^e *Emgavioù Pondi* ma peder holl dilennidi Breizh da zont da eskemm ha da selaou arbennigourien, ar bloaz-mañ re ar magourioù divyezhek en Euskadi ha tud e-karg Divskouarn, kengevredigezh Breizh ar magourioù e brezhoneg. Mod all ez eus bet labourer dorn-ha-dorn gant an Ajoñs Diorren ha Divskouarn e Penn-ar-Bed hag en Aodoù-an-Arvor evit kizidikaat tud an departamant (PMI) hag evit skoazellañ an dud o doa c'hoant da zigeriñ dorioù ar magourioù d'ar brezhoneg.



Skignañ an dafar brudañ gant ar strollegezhioù tiriadel brudadeg 2007

- Kumunioù a skign skritelloù bras pe skritelloù 80x120 + skorou all ar vrudadeg
- Kumunioù a skign skritelloù A3, plegfollennoù pe ur pennad embannet er c'hannadig-kêr
- Skritelloù bras skignet war rouedad an departamant

War tachenn ar skolioù ez eus bet labourer gant an 3 hentad (Diwan, Div Yezh ha Dihun) ha disoc'hoù pleustrek zo bet evel ar blaketenn bet embannet gant skoazell Meurgêr Roazhon evit kinnig ar c'heleñn divyezhek d'an dilennidi (ur blaketenn hep he far e Breizh). Ul labour don zo bet gant an 3D, ar sindikadoù SGEN-SNUIPP-SNESS, Div Yezh hag an Ofis evit kinnig ur steuñv diorren d'an Ensellerezh Akademiel e Naoned.

► DILEURIAÑ AR BREZHONEG E DIAVAEZ AR VRO

Kendalc'het en deus an Ofis da eskemm gant frammoù all e Frañs. Degemeret e oa bet implijidi eus Ofis Publik an Euskareg hag eus an Ensavadur Okitan e miz Meurzh. Evel framm-prizaouer eo ezel an Ofis eus an Amassada ivez, anezhañ ar bodad bet krouet gant Kuzul-rannvro Akitania da sevel ur politikerezh yezh evit an okitaneg. Dre deir gwezh ez eus bet emvodou e Bourdel. Evit echuiñ ganti ez eus bet kemeret perzh gant an Ofis en Emgavioù Etrerranvroel a oa en Euskadi er bloaz-mañ, peadra da eskemm war al liammoù gant an EBSSA evit an niveridigezh, ar CNFPT pe ar mediaoù.

Divizet ez eus bet mont pelloc'h avat ha kemer perzh er rouedad savet diwar atiz Ofis ar C'hembraeg : ar Rouedad evit Brudañ al Liesseurtegezh Yezhel. Goude bezañ bet en emvodou savidigezh ar rouedad en Amsterdam ha Brusel eo ezel an Ofis eus ar rouedad-se a zo arc'hantaouet gant Unaniezh Europa abaoe miz Du 2007. E bal eo kennerzhañ labour pep hini, pouezañ war Brusel, reiñ keloù eus ar programmoù nevez ha skoazellañ an izili da ginnig raktresoù asambles.



▶ DAFAR BRUDAÑ NEVEZ

Gant Spilhennig eo bet merket ar bloavezh 2007. Hirc'hortozet e oa an arouez bihan-mañ gant ar vrezhonegerien a-benn gellout en em anavezout. Kinniget eo bet gant an Ofis da vare an abadenn hetoù e Plouzeniel d'an 19 a viz Genver. 5000 skouerenn zo bet graet da gentañ met gant ar berzh en deus graet ez eus bet ezhomm ober 5000 ouzhpenn a-raok an harv ha 5000 adarre da vare an distro-skol.



Nevesaet eo bet diskouezadeg an Ofis war istor ha stad ar brezhoneg bet savet e 2000. Goulennet e vez kalzik er skolioù, tiez-ker pe er festivalioù...

Evit ar wezh kentañ e oa bet lakaet diskouezadeg an Ofis war wel da geñver Emvod ar Gelted ma oa ur stand Ofis evit ar wezh kentañ ivez. Ur c'hennlabour frouezhus zo bet skoulmet gant pennoù ar festival ma vo gwelet ha klevet muioc'h-mui a vrezhoneg. Bezañ an Ofis en Oriant a ya da fetisaat un diviz bezañ muioc'h war wel e-pad festivalioù an harv (ouzhpenn



Panellerezh Emvod ar Gelted

d'ar salonoù goañv evel Expolangues, e Pariz ma ro an digarez deomp kaout darempredoù gant Bretoned Pariz a oa bet diskouezet dezho Diagnostik ar brezhoneg en Enez-Frañs er bloaz-mañ). Estreget en Emvod ar Gelted e oa ur stand gant an Ofis en Erez Kozh ha labourer hon eus ivez gant Festival Kan ar Vartoloded e Pempoull.

Ar brezhoneg, yezh keltiek nemeñ kaset war an douar-bas

Le breton, une langue celtique parlée sur le continent

Ar brezhoneg, ur yezh allas

Le breton, une langue originale

NOMBRE DE PARLANTS EN 2007		NOMBRE DE PARLANTS EN 2008	
Zone	2007	2008	2009
Zone A	100 000	100 000	100 000
Zone B	100 000	100 000	100 000
Zone C	100 000	100 000	100 000
Zone D	100 000	100 000	100 000
Zone E	100 000	100 000	100 000
Zone F	100 000	100 000	100 000
Zone G	100 000	100 000	100 000
Zone H	100 000	100 000	100 000
Zone I	100 000	100 000	100 000
Zone J	100 000	100 000	100 000
Zone K	100 000	100 000	100 000
Zone L	100 000	100 000	100 000
Zone M	100 000	100 000	100 000
Zone N	100 000	100 000	100 000
Zone O	100 000	100 000	100 000
Zone P	100 000	100 000	100 000
Zone Q	100 000	100 000	100 000
Zone R	100 000	100 000	100 000
Zone S	100 000	100 000	100 000
Zone T	100 000	100 000	100 000
Zone U	100 000	100 000	100 000
Zone V	100 000	100 000	100 000
Zone W	100 000	100 000	100 000
Zone X	100 000	100 000	100 000
Zone Y	100 000	100 000	100 000
Zone Z	100 000	100 000	100 000

▶ 6^{VET} PRIZIOÙ RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG

Gant skoazell Kuzul-rannvro Breizh eo bet aozet ar Prizioù er Maezioù-Frank e Roazhon d'an 31 a viz Mae.

Tri den yaouank a zo bet priziet er rummad "hiniannoù" : Iwan Benoist a gan rap e brezhoneg, Nicole Guiziou a ginnig abadennoù arvestoù bev ha Katell Leon he deus krouet ur strollad c'hoariva gant krennarded bet skoliataet en hentadoù divyezhek.

Er rummad "kevredigezh" eo bet priziet ar gevredigezh Kerlenn Sten Kidna, oberiant abaoe ouzhpenn 40 vloaz e bro an Alre ha div gevredigezh yaouank : Gwagenn TV ha Kaouenn Net a zo o fal skignañ abadennoù war ar genrouedad.

Evit ar rummad "embregerezhioù" eo aet ar prizioù gant Embannadurioù An Amzer bet lakaet ganto ar manga lan e brezhoneg, an Afobat Penn-ar-Bed mennet da ginnig stummadurioù war micherioù




Loreidi Prizioù 2007

ar sevel-tiez e brezhoneg ha Stumdi, evit e ober nevez : ur fichennaoueg tud a vicher gouest da labourat en hor yezh evit an embregerezhioù a glask implijout brezhonegerien.

▶ AN AJAÑS DIORREN, EZHOMMOÙ A GRESK

A-drugarez da zigoridigezh kreizenn an Ofis en Aodoù-an-Arvor e Kawan en deus gallet an Ofis en em zispakañ muioc'h e hanternoz ar vro a-hed ar bloavezh. Da-heul un adframmarur diabarzh eo deuet Fulup Travers da grenvaat ar servij e Bro-Roazhon ivez. Guillaume Morin a labour eus Montroulez da Sant-Maloù. Erwan ar C'hoadig a ra war-dro an dachenn eus Bro-Leon betek an Oriant ha Visant Roue eus an Alre da Naoned.



Dasparzh takad en Ajañs



Ofis ar
Brezhoneg

Office de
la Langue
Bretonne

Danevell
obererezh
2006

Pol melestradurel / Pôle administratif

Renner hollek / Directeur général : Fulup Jakez



Fulup Jakez

Genidik eus Kemper, Renner an Ofis eo. Emañ staliet e Karaez.

Natif de Quimper, il occupe la fonction de Directeur. Il est basé à Carhaix.



Koupaia Latimier

A orin eus Bro Dreger, karget eo eus sekretouriezh ar renerezh hag eus mererezh ar vuhez kevredigezhel e kreizenn Roazhon abaoe 2000.

D'origine trégoroise, elle assure le secrétariat de direction et la gestion de la vie associative sur le site de Rennes depuis 2000.



Fulup Travers

A orin eus bro Witreg, labourat a ra en Ofis abaoe 2000, e-karg emañ eus kreizenn Roazhon.

Originaire du pays de Vitré, il travaille à l'Office à Rennes depuis 2000, il est responsable du site de Rennes.



Katell Jacquet

Sekretourez-kontourez genidik eus Plouha, labourat a ra en Ofis e Karaez abaoe 1999.

Secrétaire-comptable, native de Plouha, elle travaille à l'Office à Carhaix depuis 1999.



Pascale Herson-Macarel

A orin eus Paris, labourat a ra en Ofis e Naoned abaoe 2003, karget eo eus ar c'hehentin.

Originaire de Paris, elle travaille sur le site de Nantes depuis 2003 et prend en charge la communication.

Pol yezh / Pôle langue

Den e-karg eus ar pol / Responsable du pôle : Olier ar Mogn

TermBret



Olier ar Mogn

Roazhonad a orin, Renner skiantel eo. Labourat a ra en Ofis abaoe ar penn kentañ hag e Roazhon emañ e vurev.

Natif de Rennes, il est Directeur scientifique. Il travaille à l'Office depuis l'origine et est basé à Rennes.



Selim Salem

Roazhonad, e labour en Ofis e Roazhon evel termenadurour abaoe 2005.

Rennais, il est terminologue et travaille sur le site de Rennes depuis 2005.



Iwan Kadored

Kuzulier war ar yezh (adlenerner-difazier), a orin eus Gwened, labourat a ra e Brest evit an Ofis abaoe 2004.

Conseiller linguistique originaire de Vannes, il travaille à l'Office depuis 2004 et est basé à Brest.

Treiñ-Alliañ / Traduction-Conseil



Gwenn-Ael ar C'helleg

Genidik eus ar Baol, labourat a ra evel troer e kreizenn Karaez abaoe 1999.

Natif de La Baule, il travaille en tant que traducteur sur le site de Carhaix depuis 1999.



Thierry Fohanno

Troer, labourat a ra en Ofis e Karaez abaoe 2005.

Traducteur, il travaille sur le site de Carhaix depuis 2005.



Rozenn Morvan

Bet ganet e Sant-Maloù, troerez eo e Roazhon abaoe ar penn kentañ.

Native de Saint-Malo, elle est traductrice à Rennes depuis l'origine.



l'équipe des permanents

Glad yezhel / Patrimoine linguistique



Marc Cochard

Genidik eus Plougonven, e-karg eus ar servij Glad yezhel, emañ o labourat en Ofis e Karaez abaoe 2000.

Originaire de Plougonven, il est responsable du service Patrimoine linguistique et travaille sur le site de Carhaix depuis 2000.



Herve Gwegen

A orin eus Skrigneg, labourat a ra er servij glad hag heuliañ a ra teuliadoù ar panellerezh-hent divyezhek e Karaez abaoe 2004.

Originaire de Scrignac, il suit les dossiers de signalisation routière bilingue au sein du Service Patrimoine Linguistique à Carhaix depuis 2004.



Yannig Madeg

Dastumer a orin eus an Aire, labourat a ra en Ofis e Planvour abaoe 2006.

Agent de collecte pour l'Office sur le site de Ploemeur depuis 2006, il est originaire d'Auray.

Pol yezh ha kevredigezh / Pôle langue et société

Den e-karg eus ar pol / Responsable du pôle : Visant Roue

Ajañs diorren / Agence de développement



Visant Roue

Ganet e Gwened, emañ e-karg eus an Ajañs diorren hag e penn burev Naoned abaoe 2001.

Natif de Vannes, il est en charge de l'Agence de développement et dirige le bureau de Nantes depuis 2001.



Guillaume Morin

Karget a diorren, implijet eo gant an Ofis en Aodoù-an-Arvor e Kawan abaoe 2006.

Chargé de développement, il est employé par l'Office sur le site des Cotes-d'Armor à Cavan depuis 2006.



Erwan ar C'hoadig

Karget a diorren, genidik eus Pempoull, labourat a ra en Ofis e Karaez abaoe 2000.

Chargé de développement, natif de Paimpol, il travaille à l'Office à Carhaix depuis 2006.

Arsellva ar brezhoneg / Observatoire de la langue bretonne



Catherine Bouroulleg

A orin eus Kemperle, labourat a ra evel sokioyezhoùreuz e kreizenn Roazhon abaoe ar penn kentañ.

Originaire de Quimperlé, elle travaille comme sociolinguiste sur le centre de Rennes depuis l'origine.



Nolwenn Louarn

Roazhonadez, emañ e-karg eus "Keleier" abaoe ar penn kentañ, labourat a ra e Roazhon.

Rennaise, elle est chargée de la réalisation de "Keleier" depuis l'origine et est basée à Rennes.



Meriadeg Vallerie

Ganet e Kemper emañ o labourat evel sokioyezhoùreuz en Ofis e Roazhon abaoe 2003.

Natif de Quimper, il travaille en tant que sociolinguiste à Rennes depuis 2003.